

(5)

Lanaouen
Da ober ar Dans tro.

Var un ton vif.

Biscoas ne c'hoarzijs gement all
Vel e Pontecroas an dez all,
O velet, goude ar sarmon,
Ar binion gant ar Person.
Dansit, merc'het, ha gñit ar bal,
Ha lest ar c'hure da champal.

Nemeus get gallet refuzi
Merchet a zo deut d'am pedi
Da gomparji eur garoten
Evit ma ijint o losten.
Dansit, merc'het, ha gñit ar bal,
Ha lest ar c'hure da champal.

(6)

En despet da gement a zo,
Dans a zo bet, dans a vezo.
Injust ha cris eve difen
D'an deud yaouanq beza laouen.
Dansit, merc'het, ha gñit ar bal,
Ha lest ar c'hure da champal.

Me voar erfat petra zo cos
Eo grignous atao ar re gos:
Gallout a rent, mes n' allont mui
Dansal ha lamet couls ha ni.
Dansit, merc'het, ha gñit ar bal,
Ha lest ar c'hure da champal.

Pa vezoc'h scuis e labourat,
 Deut da ziscuiza d'an ebat;
 Neus netra coulz hag an draze,
 Goelloc'h e cousquer goudeze.
 Dansit, merc'het, ha grid ar bal,
 Ha lest ar c'hure da champal.

(7)

Mes na bermetit get james
 E ve tud fal en o touez;
 Neus na plijadur nag ebat
 Nemet e compagnuney mad.
 Dansit, merchet, ha grit ar bal,
 Ha lest ar chure da champal.

(Vol. I, p. 5-7.)

 Couplet.

(434)

Var un ton charmant.

An noz diverza, ha douzic,
 Emeus sonjet dre va ure
 O proa roet din eur poqig
 Gen tomic ha gen sasur.
 Ma ve quir ze, va laouenan,
 Gement eo va c'harante,
 Ha pa ve teir noz en unan,
 Ne garfen get e ve de.
 fin.

(Vol. I, p. 434.)